

DIVUNADELLOÙ HA DIVINADENNOÙ !

« Ac'h ! An divinadennoù pan oamp bugale ! O dibunañ dre'n eñvor a ouiemp ober kalz gwelloc'h evit hon c'hentelioù pe hon c'hatekiz.

Pebezh plijadur e oa dimp lakaat hon speredoù da guriuziñ gant an enigm diwezhañ bet desket en noz a-raok e korn an oaled hag ivez lakaat hon c'hamaraded da vamañ gant hon gouiziegezh nevez !

En disterañ divunadell vrezhoneg, koulz hag en enigmaoù ar Sfins, eo bepred degaset ar gudenn gant geriennoù amsklaer pe forc'hellek, rak seul diaesoc'h ar goulenn seul vrasoc'h plijadur an hini a sav anezhañ dirak ar reoù lakaet berrek.

Savet eo an divunadelloù war batrom ar metaforennoù, sklaer mui pe vui, pe neuze war ur c'hoari etre ar gerioù. Brasoc'h an diaester ober gant gerioù ijinet, met plijus abalamour d'ar sonioù a zegasont (dibidapenn, patantenn, turlutig, koperig, tontonig, etc.). »

Sede ar pezh a oa gerioù Jules Gros (1890-1992) diwar o fenn.

Un vengleuz pinvik evit deskiñ un toullad traoù, evit kompren mont endro ar gevredigezh, evit farsal ivez ! Hep kontañ e ranker lakaat e vemor da labourat.

Amañ da heul divunadelloù a-bep seurt tennet diouzh labourioù pe kelaouennoù a-bep seurt ivez. Un toullad kaer anezhe zo anavezet mat gant un toullad tud c'hoazh : un digarez da freskaat e vemor ha da degas reoù all da soñj.

N'int ket renket mat, digarez da gemer anezhe evel lodennoù « tapas » hon yezh...

Lod zo bet « pesketaet » e Treger, lod pelloc'h, lod gant Jules Gros, evel just, lod gant Armañs ar C'halvez, lod gant Pêr Martin, un hinienn bennak ganin klevet pell zo etre Trogeri ha Planiel...

Herve Bihan

1) Niveriñ an traoù

Pegement a ra nav barr ha nav yar war bep barr hag ur c'hog gant peb yar ha nav foñsin gant pep yar hag ur greunenn ed e beg pep poñsin ? 1629.

Pegement a ra tri femp pemzek ha daou seitek ha tri ugent ? Ugent.

2) Ar mor

Don evel puñs, ha puñs n'eo ket
Gwenn evel liñsel, ha liñsel n'eo ket
Glas evel kaol, ha kaol n'eo ket
Petra eo ?
- Ar mor !

3) Ar pezh a gaver en genoù an dud

Div renkennad seurezed o vont gant an hent hag eur beleg ruz e-kreiz ? An dent hag an teod !

4) Unan eus an divunadelloù brudetañ

Unan o turniat,
Daou o sellet,
Daou o chilaou
Hag unan o skeiñ war an toull.
Petra eo ?
- Ar pemoc'h.

5) Unan all ken brudet all

Petra eo yenañ tri dra zo en ti ? Treid ar wreg, daoulin an ozhac'h ha fri ar c'hi.

6) Un tamm filozofiezh er pemdez

Evit petra ho peus div skouarn hag un teod hepken ? Abalamour eo gwelloc'h selaou evit komz.

7) Enigmoù evit gwir mesket gant un tamm filozofiezh
Petra a vez troc'het war an daol hep bezañ debret ? Ar c'hartoù.

Petra a ra an dro d'ar park hep mont e-barzh ? Ar c'hleuz (ar c'hleuñ).

Pere eo ar pesked hep drein ? Ar pesked-Ebrel.

Petra a reomp holl war-un-dro ? Kozhañ.

Petra a verra en ur hiraat ? Ar vuhez.

Piv zo mab d'ho tad hep bezañ ho preur ? C'hwi hoc'h-unan.

Skrivit geot sec'h gant pemp lizherenn ? Foenn.

Un dra ha n'eo ket bet gwelet biskoazh ? Un neizh logod e skouarn ar c'hazh.

8) An dizouj politikel
N'on ket roue hag e tougan ur gurunenn
N'on ket marc'heg ha koulskoude em eus kentrou
N'on ket skrivagner hag e tougan ur bluenn
N'on ket keginer ha koulskoude e roan da zebriñ.
- Ur c'hog.

9) Un divunadell diouzh ar c'houlz : ar cheñch en amzer... gwir ha spontus
Petra ac'h a primoc'h dre al lann evit dre an hent bras ? An tan.

10) Dre chañs e c'haller sellet plaen ouzh an oabl evel m'emañ
Nijal a reont hep divaskell ha redek a reont hep divhar ? Ar c'houmoul.

11) Re wir
Piv eo an dud hag a garfe bezañ born ? An dud dall.

12) Un dizouj politikel all
Pehini eus rouaned ar Frañs en deus douget ar gurunenn vrasañ ? An hini en doa ar penn
brasañ.

13) Hag evit echuiñ un teir bennaket n'int ket brudet evit bezañ seven pe diouzh grad an dud a herie,
met a blij kement ! Etrezomp !

Pegoulz e kaver ar muiañ gloan war an dañvadez ? Pa vez ar maout war he c'hein !

Pegoulz e vez ar muiañ pluñv (plu) war ar yar ? Pa vez ar c'hog warni.

A deu war an douar hep kroc'hen hag a varv en ur ganañ ? Ur bramm.

Levrlennadur

Armañs ar C'hlavez, 300 divunadell, Skol, Nedeleg 1955, Niv. 4.

Jules Gros, Le trésor du breton parlé, lodenn 3, Le style populaire, 1974, pp. 328-335.

Pierre Martin, Mouez Kerne – Echo de la Cornouaille, en Oriant, 1929, pp. 165-173.

Lenn ivez kelaouennoù kozh evel Dihunamb !, Kroaz ar Vretoned, Al Liamm, Feiz ha Breiz : enne e kaver forzhik divunadelloù. Ar braz anezhe a c'haller pellgargañ war internet.